



## RECIT

*Demeus a dorfet* ALAN SAINT-JALMES ha FANCH MESJEAN, pere ho deus assassinet ha massacret **Gouill AR PERSONNIC**, ar seizvet a viz ebrel, da zec heur diouz an noz, en eur plaç hanvet ar Ponticou, e parres Panverit-ar-C'hoat. — SAINT-JALMES en deus paet he grim voar eur chafaud, e Sant-Briec, ar seizvet a viz querzu, ha MESJEAN zo bet condaonet d'ar galeou epad he vuez.

---

Laquet e gouers gant J.-M. PHILIPPE, eus a Blouec-ar-Mor.

---

Voar ton : *Meulet ra vezo an Dreindet.*

1. Tostaet oll asistantet,  
Ha c'honi glevo eur recit  
Deus a boanion ar Personnic,  
Pehini zo bet assassinet  
Ar seizvet a viz ebrel,  
Gant daou dorfetour cruel.
2. Mes quent evit ma expliquin  
Ar malheur-mañ pen-da-ben,  
Me a c'houlen ar sclerijen  
Ouz ma Salver, ma mestr divin;  
Accordi a rei he c'hraçou  
Da guement ho goulenno.

3. En quemment plaç ma valeau,  
Pa lennan ar c'helaouiou,  
Nemert comz a valheuriou  
Na rer pell zo er vro-man;  
Na gred quen an dud bale  
Dre au hent nemert en de.
4. Petra a zo caus, christenien,  
Hon Salver hepquen en goar,  
Ma zo breman voar an douar  
Eun nombr quen bras a valheuriou;  
Ha ma condaoner da vervel  
Quen lies a dud cruel?
5. Doue a dorro ar voalen  
Pa blijjo d'he vadelez,  
En hor brassa tristidiguez,  
He garantez vo hor souten;  
Rac m'hon dilesfe eur momet  
Da netra e vemp rentet.
5. Pa hon deus offret da Zoue  
Hon labour quent 'vit commanç,  
Prestit eur momet a silanç  
Ha c'houi glevo hep dale  
Pescurt poaniou en deus bet  
Ar Personnic anduret.
7. Daou zen euz a Banverit  
A voa ho daou pell a zo  
Oc'h ober goal laeronciou  
Hac ho pillat tier pinvidic;  
Saint-Jalme a voa unan ane,  
Ha Fanch Mesjean eguile.
8. Mes Doue, scuiz ouz ho guele  
Ho cundain goal vue,  
A ro quer scler evel an de  
Ho c'hrimou d'an holl da hanavet,  
Ha ma teu an holl hep dale  
Da doujan an daou den-ze.

9. Querquent ho deus bet soupçonnet  
 Ar Personnic da veza  
 Unan demeus ar re guenta  
 Da ober d'an dud hanavet,  
 E vijent ho daou bemdez  
 O laeres bars er chontre.
10. Ouz ar Personnic ho deus bet  
 Quemeret eur valiç vras ;  
 O doujan a re, mes, allas !  
 Na vouie quet ho doa laret  
 E rojent, hep dale dezan,  
 Eun evach c'houerv da evan.
11. Mont a ra an daou vuntrer,  
 Gant an ifern possedet,  
 Evit cometti ho zorfet  
 Pa vije o vonet er guer,  
 En eur plaç e lec'h n'helje quet  
 Beza gant den sicouret.
12. Evel chass clanv gant ar gounar,  
 Pa ze gante arruet,  
 Voarnan querquent e zint lampet,  
 M'ho deus-hen taolet d'an douar,  
 Ha n'ho deus-hen quet quitact  
 Quen na voa holl massacret.
13. Oh! nosvez an deplorapla !  
 Oh! nosvez a dourmanchou !  
 Bars en alle ar Ponticou  
 Eman an douar o rna  
 Gant goad ar paour quez malheurus  
 En tourmanchou horreras.
14. Caer en doa Gouill ar Personnic  
 Crial o c'houl he vue,  
 Allas ! den ebet n'hen cleve !  
 Rac demeus a vourg Panverit,  
 Na deue den en noz-se  
 Dre an hent malheurus-se.

- 15. En he benn en doa recevet  
Eun nombr bras deus a daoliou;  
Ouspen seiz deus he gostennou  
A voa torret ha draillet;  
Ebars en tourmanchou brassa  
En deus ranquet perissa.
- 16. Holla! munterien malheurus,  
An nos a goach ho crimou;  
Mes Doue, crouer an envou,  
Pehini a zo trugarezus,  
A ro d'an oll anaondegues  
Demeus ho fallagries.
- 17. An de voarlerc'h, deus ar heure,  
An eizvet a viz ebrel,  
Ebars en eur stad meurbet cruel,  
Ar c'henta den a dremene,  
Voar an hent en deus cavet  
Ar Personnic massacret.
- 18. Doue carantezuz ha mañ,  
Me ho suppli, consolet  
He vugale hag he bried.  
O vouelet e peseurt etat  
E voa laquet an den-se,  
Den ebet n'hen hanave.
- 19. Oh! Gouerc'hes, mam garantezuz,  
Clevet hoc'h eus he glemou,  
Deut, pa zoc'h bars en envou,  
Da bedi hor Salver Jesus,  
Vit m'hen recevo da repos.  
E joaiou ar barados.
- 20. C'houi pere zo ouz ma chelaou,  
Me ho ped, pedit ive  
Oll evit ene an den-se,  
Marvet hep le sacramanchou,  
Vit ma zeñ da veuli Doue  
Epad an eternite.

21. Mes prestil hoc'h attantion,  
 Me ho ped c'hoas eur momet,  
 Ha c'houi a vouelo na chom quet  
 Ar c'hrim pell hep punition;  
 An daou den malheurns-ma  
 Zo eun exempli ar c'haera.
22. Me a explico dec'h breman  
 Penaus eo bet arruet  
 Da veza bet anaveet  
 An daou vuntrer malheurns-man,  
 Goude beza hep nep true  
 Merzeriet an den-se.
23. Quent evit commanç explica  
 Penaus eo bet arruet  
 Ma' zint hep dale quemeret,  
 Me a explico dec'h brema  
 Eur sacrileich spountus meurbet  
 Eu deus Saint-Jalmes commettet.
24. Eur gonscianç leun a viçou,  
 Biscoas ne deo bet souezet  
 dionz action fall ebet;  
 Rac bepret, constet a gousto,  
 Na neglijo moyen ebet  
 Da goach he grimou d'ar bed.
25. Da dy Saint-Jalmes e teu neuze  
 Leun a joa an daou vuntrer  
 Da gomz voar sujet an taol caer  
 Ho doa gret ho daou en noz-se;  
 Mes n'ho devoa remors ebet  
 Da veza gret an torfet.
26. Dirac ar vugale, en ty,  
 E teclarent ho zorfet;  
 Ho dillad ho deus bet chanjet  
 Evit ma heljot ho gouelc'hi,  
 Dre ma voant souillet gant ar goad  
 Goude ho c'hrim detestab.

27. Saint-Jalmes a deu da gometti  
 Eur sacrileich en noz-se,  
 Rac mont a ra en he vouele,  
 Ha ma ra guervel d'hen noui  
 Eur beleg da dol hanter noz  
 Pa voa an oll ho repos.
28. Hola ! hippocrit milliguet,  
 Offanci a rez Doue  
 O tout ebars er feçon-se,  
 Voar daouarn gant ar goad souillet,  
 Da c'houlén an eol sacr,  
 Oh ! sacrileich execrab !
29. Chetu nouet ar malheurus,  
 Carguet a hep seurt crimou ;  
 Ar beleg ezet a dromplou  
 Saint-Jalmes, ar muntrer malheurus.  
 Mes Doue a losq he goler  
 Voar an hippocrit muntrer.
30. Sortiomp demeus an ty-ma,  
 Souillet gant peb seurt crimou,  
 Ha retornomp d'ar Ponticou  
 Gant ar justic da visita  
 Corf ar paour quez malheurus  
 Pehini a voa spontus.
31. An doctor en deus discleriet  
 D'ar justic a vouez huel,  
 Biscoas c'hoas maro quen cruel  
 Den ebet n'en deus bet souffret  
 Evel ar merzer paour-se  
 Diouz ar pez a voele.
32. Pebez calonad, ma Doue,  
 D'an intanves desolet,  
 O vouelet peguen massacret  
 A voa he fried en noz-se !  
 Quement a straque he c'halon  
 Quen a re compassion.

33. Sevel a rer ar c'horf paour-se  
 Evit hen c'has d'ar vered ,  
 Ha graç ma vo recevet  
 En palez an Autrou Doue  
 Da bossedi ar joaustet  
 Pa zeo bet merzeriet.
34. Dont a rer da interrogin  
 An oll dud deus ar c'hontre ,  
 Evit gout hag en a vije  
 Cavet an auteur deus ar c'hrim ;  
 Mes den ebet na discuille  
 An daou den malheurus-se.
35. Eur vroeg a voal intantion  
 A rent eur fals testeni  
 A enep eun den pehini  
 Na voa coupabl en nep feçon ;  
 Couscoude, voar boez eur soupçon ,  
 E voe laquet er prison.
36. Mes Doue en deus permettet  
 Ma vije hanavezet  
 Penaus an-den-se na voa quet  
 Coupabl demeus a grim ebet ,  
 Ma teu ar justic hep dale  
 D'hen laquat en liberte.
37. Interrojet , ar vugale  
 E tiscleriont pen-da-ben  
 D'ar justic ar vuntrerien ;  
 Ha m'ho c'hemerer hep dale  
 Evit ho c'has d'ar prison  
 Da c'hortos punition.
38. Chetu sonet heur ar venjanç ,  
 Condaonet ar vuntrerien ;  
 Saint-Jahnes a gollo he benn  
 E Sant-Briec, voar eur potanç.  
 Bars e miz querzu e zeo bet  
 Ar seizvet de dibennet.

39. **Quent mervel en deus goulennet**  
Pardon deus he bec'hejou  
Ha bet he sacramanchou  
Gant devotion bras meurbet.  
Goulennomp oll diouz Doue  
Ar pardon vit he ene.
40. **Mesjean a zo bet condaonet**  
Da vonet d'ar galeou  
Da finissa he zeiziou  
Evel m'hen deus bet meritet.  
Graç deomp da veza preservet  
Da goueza bars er pec'het.

